

5 1959

SKOL

DASTUMADENN
▲
GELENNOURIEZH



▲ NIVERENN 5 ▲

oooooooo oooooo oooooo oooooo oooooo
oooooooo oooooo oooooo oooooo oooooo
oooooooo oooooo oooooo oooooo oooooo

oooooooooooooooooooooooo
MEURZH 1959.
MARS
oooooooooooooooooooooooo

niverenn 5.

Dastumadenn drimiziek a Gelennouriezh.

Rener : Armañs Ar C'halvez, Skol Sant Erwan, PLOUEG-AR-MOR.

Priz an niverenn : 200 lur.. Priz ar c'houmanant : 1 000 lur.

Kont-red post : Revue SKOL, Rundavid, PLOUEZEC.C du N.
Rennes, 1911 06.

Prix du numéro : 200 f. Abonnement annuel : 1 000 f.

N'oubliez pas de renouveler votre abonnement . Merci !

Prière d'utiliser le C.C.P. ci-dessus.

Please, renew your subscription, and send, as soon as possible ,
the equivalent of 1 000 frncs to :

Armand LE CALVEZ, Barclays Bank, LLANRWST, North Wales.

T A O L E N N .

Ar "Brezhoneg er Skol" gant Arm.Ar C'halvez.	p. 2.
Buhez an dastumadenn S K O L	p. 4
Buhez ar gelaouennig WANIG HA WENIG	p. 5
Hor Boest-Lizhiri	p. 6
A-dreuz lenn ,gant Herve Konan.	p. 9
Levrioù evit ar Vugale hag ar Skolioù, H.Konan.	p.12

stagadennoù :

- 1- Enklask diwar-benn ar " Brezhoneg er Skol"
- 2- Testennoù ar bladenn "Rimadelloù ha Kanaouennoù evit ar vugale embannet gant "Komz Ha Kan ".

Ha kaset hoc'h eus ho skodenn da GEVREDIGEZH AN DESKADUREZH NEVEZ ?
K.R.P. Abbé Le Calvez, PLOUEZEC. ROAZHON, 863 85.

Ha koumanantet oc'h da W A N I G H A W E N I G ?

4 niverenn e 1958/59. ----- 2 niverenn embannet endeo.

150 lur : Journal WANIG HA WENIG, PLOUEZEC, C du N,

K.R.P. Roazhon : 1705 96.

Périodique inscrit à la C.P.P.P. sous le numéro : 35 323.

" AR BREZHONEG ER SKOL ".

Embannet ez eus bet, pe embannet e vo, gant gouarnamant Pariz, testennoù hag a c'hellfe aesaat kelennerzh ar Brezhoneg en amzer-da-zont:

- 1 - kemennadur ar 6 a viz genver 1959 evit adreⁱzhañ an deskadurezh publik;
- 2 - un danvez-lezenn diwar-benn an deskadurezh prevez; (gwel. disklariadurioù ar c'hentañ ministr Debré e mizioù genver ha meurzh)
- 3 - ur mennad-lezenn diwar-benn kelennerzh ar yezhoù "lec'hel".

A - Sklaer e teu da vezañ bremañ n'eus nemet un tu da gelenn efedus ar yezh: sevel skolioù divyezhek diwar skouer hini Sant Erwan, en ur wellaat c'hoazh he doareoù dre vras hag he doareoù-kelenn. N'ouzer ket c'hoazh dres peseurt lezenn a vo kinniget da Gambr ar Gannaded gant ar Gouarnamant diwar-benn an Kelennerzh Prevez. Gellout a reer lavarout neozh, hep aon da faziañ kalz, e vo kinniget an divizoù da heul:

- 1^o paeañ ar vistri gant ar Stad ;
- 2^o sikour ar skolioù d'ober war-dro an dispignoù all dindan stumm ur skoazell-arc'hant evit pep skoliad, e-giz ar "skoazell Barangé";
- 3^o prestañ arc'hant evit marevezhioù hir hag evit un interest izel da grouiñ skolioù nevez, da wellaat ha da greskiñ ar savadurioù kozh.

Anat eo e c'hellfe ar Vretoned, a fellfe dezho reiñ d'o bugale an doare deskadurezh nac'het gouto gant ar skolioù publik ha skolioù prevez an eskoptioù, krouiñ skolioù prevez nevez diouzh o soñj.

B - Hervez kemennadur ar 6 a viz genver 1959 e vo ret dizale d'an holl vugale, goude o studioù kentañ, tremen e skolioù uheloc'h. Setu amañ un daolenn verr eus an urzhiadur nevez: (1)

a-raok 6 vloaz	skolioù babiged	
eus 6 da 11 vl	kelc'hiad kentañ	11-et , 7-et klas
eus 11 da 13 vl	kelc'hiad-evezhiañ	6-et ha 5-et, klasel ha modern.

(an dibab a vo graet gant ar vistri, arnodennoù ha kreizennoù-henchañ, hevez g'allusteroù ar skolidi)

eus 13 da 16 vl kelc'hiad-echuiñ : skolioù labour-douar, tiegezh, artizanelezh, kenwerzh, injinerezh.
Diplom diwezh ar studioù ret (Dip.de fin d'études obligatoires)

eus 13 da 16 pe 17 vl. kelennerzh vicherel
Diplomoù: C.A.P. pe Brevedoù teknikel.

eus 13 vloaz : deskadurezh hollek, klasel, modern pe deknikel.

da 16 vl: deskadurezh hollek verr . Breved an Deskadurezh hollek e dibenn an 2-et.

da 18 vl: deskadurezh hollek hir . Bachelouriezh 2-1 lodenn, 5 disheñvel .

-
- 1 - gwel. "Documentation Catholique", 15 a viz c'hwevrer 1959.
" La Famille Educatrice ", genver 1959.

BUHEZ AN DASTUMADENN "SKOL".

niver ar goumananterien. Abaoe derou an dastumadenn, miz mezheven 1954, ez eus bet enskrivet 136 koumananter. D'ar 26 a viz c'hwevrer 1959, 112 den o doa paeet o c'houmanant evit 1958. Setu penaos e tiskonter ar 24 all :

ur c'houmananter marv	: 1
renerien kelaouennoù hag a ra bremañ an eskemm	: 5
koumananterien baour hag a vez kinniget dezho ar gelaouenn evit netra	: 2
koumananterien chomet war-lerc'h gant o skodenn	: 6
tud digoumanantet	: 10

24

E-doug ar bloavezh 1959 ez eus bet gounezet 25 koumananter nevez. Spi a zo d'ober kemend-all, d'an nebeutañ, e 1959, peogwir ez eus bet kavet dija 7 koumanater nevez e-pad an daou viz kentañ eus ar bloaz.

<u>Niver ar skouerennoù</u>	<u>embannet</u>	<u>gwerzhet</u>	<u>diwerzh.</u>
<u>rummad kozh:</u>			
niv.1 "Ar C'hembraeg..."	300	260	40
niv.2 "Kel.ar Frizeg".	200	187	13
niv.3 "Douaroniezh "	210	146	64
niv.4 "300 Divinadell".	230	213	17
niv.5 "Rimadelloù ..."	250	171	79
niv.6 "Kud.ar skol.Slesvig"	200	167	33
<u>rummad nevez:</u>			
niv.1 "Skol Sant-Erwan"	270	259	11
niv.2 "Nedeleg en Breizh"	250	174	76
niv.3 "Danevelloù d.w.b..."	259	245	14
niv.4 "Kontadennoù ..."	500	278	222

Kalz a skouerennoù a vez gwerzhet distag eta. Merzomp ivez e vez dedennet al lenner dre zegouezh kentoc'h gant al levrioù-skol eget gant ar studiadennoù gouestlet d'ar broioù estren.

An niverennoù 1 ha 2, rummad nevez, a oa bet kaset, evel ma teree, d'ar vadoberourien n'ont ket koumanantet d'an dastumadenn; an niverenn 3, rummad nevez, d'ar skolioù o doa prientet kens-triverien evit Bleuñ-Brug Treger er bloavezhioù 56, 57 ha 58.

embannadurioù 1959:

- niv.5, an niverenn-mañ, anezhi ur wir dastumadenn;
- niv.6, un dastumad displegadenn evit ar vugale;
- niv.7, a vo embannet e-doug an hañv, a vo goustlet penn-da-benn da labour Skol Sant Erwan;
- niv.8, a vo niverenn ar goañv, a vo anezhi ul levr-skol bennak aozet gant unan eus hor c'henlabourerien. Meur a hini a zo war ar stern.

=====
" Imposer à nos paysans le bégaiement d'une langue à laquelle ils ne sont pas faits, à nos écoles une discipline qui fasse violence au génie natif de nos écoliers; nous ne pouvons devenir des Allemands d'Allemagne, nous ne pouvons devenir que des Allemands de France, c'est à dire non des Allemands, mais des esclaves de l'Allemagne."

Jean JAURES, e-kerzh ur respont da Gustave HERVE, 1905.

BUHEZ AR GELAOUENNIG " W A N I G H A W E N I G . "

Un degemer a mat a zo bet graet d'ar gelaouennig nevez. Stouvet ez eus bet aze c'hoazh un toull, anat eo. Kreskiñ a ra bemdez niver ar goumananterien hag ar strolladoù-koumanantoù. A-zevri-kaer e vez gwerzhet evit ur priz izel-kenañ d'ar skolioù: en doare-se e vo tu d'he lakaat etre daouarn kalz a vugale, hag dre werzhañ kalz e c'hell ivez marteze ar gelaouennig skoulmañ an daou benn.

Ar skolidi n'ouzont ket mat ar yezh o devo, da vihanañ, plijadur o livañ an taolennoù; hag ouzhpenn, er gêr, e vo lennet, marteze, gant o c'herent, ha displeget ganto dezho.

N'eo ket a-walc'h avat he lakaat etre daouarn ar muiañ ma c'heller a skolidi. Ret eo, e-pad ar sizhun gentañ, lenn ganto ur bajennad bemdez hag o skoazellañ d'aozañ ar c'henstrivadegoù. Amañ e Skol Sant Erwan, ez eus bet savet ur genstrivadeg a-ratozh: livañ an holl skeudennoù ha kinklañ ar gelaouenn penn-da-benn. Alies em eus soñjet e oa ur fazi marteze lakaat etre daouarn ar vugale kelaouennoù e meur a liv dre ma " z eo o brasañ plijadur livañ int o-unan. Sellit ouzh o levrioù-skol, o levr istor, da skouer!

Un degemer gwelloc'h a zo bet graet ganto amañ d'an eil niverenn eget d'an hini gentañ: tamm-ha-tamm e kustumont ouzh ar gelaouenn, ha tamm-ha-tamm e kemer he lec'h e-touezh o frederioù ...

niver ar goumananterien: d'ar 26 a viz c'hwevrer 1959, e kontemp
75 a goumanantoù a-unan,
183 a goumanantoù strollet .
258 en holl.




KANV HA LEVENEZ .

Hor gourc'hemennoù a gengañv kristen a ginnigomp

- d'an Aotrou ha d'an Itron Morvezen, eus Konk-Kernev, da geñver marv an Itron Morvezen, o mamm;
- d'an Aotrou ha d'an Itron Yeun Ar Gow, da geñver marv an Itron Bozeg, o mamm;
- d'an Aotrou Pêr Ar Manac'h, da geñver marv an Aotrou Jul Ar Manac'h, e dad;
- d'an Aotrou ha d'an Itron Youenn An Olier, da geñver marv o mabig Gwenael;
- d'an Aotrou ha d'an Itron Pêr Keraod, da geñver marv an Aotrou Pierre Géraud, o zad.

Ra ziskuizho e peoc'h eneoù an anaon, ha ra skuilho an Aotrou e frealzidigezh e kalonoù o c'herent.



Hor hetoù kalonekañ a ginnigomp

- d'an Aotrou ha d'an Itron Jobig Bertho, da geñver ganedigezh o merc'hig Mari-Annaig;
- d'an Aotrou ha d'an Itron Yann Cormerais, da geñver o eured .

Ra vint diwallet gant Itron Varia Vreizh !



H O R B O E S T - L I Z H I R I .

diwar-benn an niverenn diwezhañ : Kontadennoù Kozh ha Nevez .

digant Y.A.B. "Bet em eus levr an Ao.Ar C'halvez.Mat-tre eo ha plijus-kenañ da lenn...Al livioù n'int ket deut mat a-walc'h d'am soñj.Mammig a lakay livioù all.Evel-se e vo bravoc'h al levr".(15.12.58)

digant Y.T. "Plijet on bet gant an niv.4 hag ho trugarekaat a ran da vezañ savet ur benveg a seurt gant hemañ evit deskiñ ar brezhoeng bev ".(29.12.58)

digant H.D. "Lennet am eus lod euz ho "kontadennoù Kozh ha Nevez",ha va gwella gourhemennou a ginnigan deoh evid al labour talvouduz-se.Gand eur seurt benveg e tle ho skolidi dond buan da veza barreg war hor yez.Kas a rin deoh ar mankou a hellin kavoud en ho levr med heti a ran dioustu e vo kavet,eun devez,arhant a-walh d'e voula en eun doare-skriva - n'eus forz pehini a vefe - degemeret en oll skolioù Breiz-Izel". (31.12.58)

digant A.A.L. " Gwelet al levr skol.Mat e seblant bezañ hag evit an testennoù hag evit ar poelladennoù,ha Wanig ha Wenig, ivez.Setu labour a dalvezo evit meur a skol ha meur a diegezh".
(2.2.59)

diwar-benn " WANIG HA WENIG ".

digant A.A.L."Degemeret niv.2 W.ha w.Setu labour graet mat.Setu un testeni diarvar eus buhez hor yezh er skol.Setu ivez diskouezet snat an hent a zo da zibab evit ar re a venn saveteiñ hor sevenadur ha reiñ diazezoù start evit Brezhoneg ar bloavezh 2.000"
(25.2.59)

digant R.H."Setu 2.000 lur evit ar pezh a gari,met dreist-holl evit ar gelaouenn Wanig ha Wenig.Ur c'houmanant a 5 (pemp) skouerenn a gemeran".(10.12.58)

digant Y.A.O. " Meneget em boa enev ur gelaouennig evit ar vugale da lies-skrivañ,gant tresadennoù maz eus tu.6 pe 7 follenn a vefe a-walc'h gant ma teufent er-maez ingal.Evel-just hoc'h eus kalz a labour a-hend-all:marteze e c'hellot kavout unan d'hoc'h harpañ war an dachenn-se". (21.8.58)

"Daoust hag emac'h e soñj bepred ober ur gelaouennig evit ar vugale ? Dav e vefe kaout un nebeut tresadennoù-fent.Talvoudus-tre e vefe seurt kelaouenn.Va bugale n'o deus netra da lenn e brezhoneg nemet levrioù a aozan dezho p'am bez amzer...

Emaon o sevel un droidigezh diwar Tolstoï 'Prizoniad ar C'haokaz',mat evit bugale 12-13 vloaz.Marteze e kasin deoc'h da liesskrivañ,pa vo bet lennet an dornskrid gant va bugale-me. Skeu -dennoù a vefe ret kaout.(Tu a zo d'ober klichedoù war stencil).Ar vent a zlefe bezañ hini Barr-Heol,nemet bravoc'h ar paper".(20.10.58)

" Degemeret em eus 'Wanig ha Wenig'.Ur souezhadenn e gwirionez. Kerseet eo bet va bugale avat o c'houzout ne zeu ket er-maez bep sizhun.Ur bamm eo evito ur gelaouenn en o yezh. (1.1.59)

" Degemeret mat hon eus Wanig ha Wenig hag ar prizioù o deus graet kalz plijadur d'ar vugale:leun a c'hred int bremañ e-vit ober ar genstrivadeg nevez.Herve ha Rozenn (7 vloaz warc'hoazh, ha 5 bloaz) a zo bet kerseet da chom hep kaout netra hag o deus graet o soñj ober ar genstrivadeg en dro-mañ.

Mat e rit oc'h embann W.ha W. evel-se:broudet eo ar vugale da lenn ha da studiañ ar yezh gant plijadur.Ouzhpenn-se n'en em santont ket o-unan.Ar gelaouenn a zo un ere etrezo."(23.2.59)

" Bet em eus an div skouerenn eus W.ha W.Lennet int bet gredus gant va bugale.Ar ^{re} vihan zoken.Va mab henañ a zo itik d'ar c'henstrivadegou ha graet en deus div anezho a gav din evit bezañ suroc'h da c'hounit".(5.3.59)

diwar-benn SKOL dre-vras.

digant .H.D. "Resevet am eus nevez'zo niv.3 ho kelaouenn "Skol". Trugarez a lavaran deoh eviti.He lennet am eus penna-da-benn ha plijet e-neus din dreist-oll an daou renta-kont diwar ho skol diouyezeg ha kenstrivadegou ar Bleuñ-Brug.Ar pennadoùigou ' A-dreuz lenn ' a zo kenteliuz-tre ivez:en eur weled penaoz ez an traou war-raog er broiou all ez om kennerzet ni hon-unan da glask gwellaad stad hor yez e Breiz ".(9.10.58)

digant E.O." Kas a ran dit 800 lur evit"SKOL" ,a zo graet mat,mat-tre zoken,hag a lennan pen-da-benn hep tamm diaezamant, zoken gant kalz a blijadur.Tu a vije marteze,diwezhatoc'h,d'ober un enklask diwar-benn menozioù ar yaouankiz (15-20 vloaz) e-keñver ar yezh". (20.10.58)

diwar-benn kudennoù ar yezhoù en Afrika.

digant P.P. "Soñjet em boa dija dastum notennoù diwar-benn an deskadurezh e Tunizia,met bete vremañ n'em eus ket bet amzer d'hen ober.E miz here a zeu e vin marteze anvet e Tuniz,ae-soc'h e vo din,rak e Karthada emeon en ur c'helenndi gall,heñvel-mik ouzh ur c'helenndigall e n'eus forzh pe vro,nemet e vez desket an Arabeg evel 'yezh estren' en eil derez d'ar skolidi a choaz anezhañ,ha desket ez-ret er c'hlasoù kentañ derez.(Div eur bep sizhun,a gredan,arabeg 'komzet',da lavarout eo ar rannyezh tuniziek).

War dachenn an deskadurezh Tuniziat,emañ tamm-ha-tamm an traoù o kemmañ:ar skolioù uhel a chom ar Galleg o yezh,hag an arnodennoù a zo atav ar re c'hall;ar c'hemmoù a zo dreist-holl bet degaset er skolioù kentañ,a vez arabekaet tamm ha tamm;un adstummidigezh nevez a zo bet divizet,lakaet e vo da dalvezout e-doug ar bloaz a zeu hep mar ebet." (15.7.58)

digant J.P. " Diaes eo desevel bugale vihan en hor yezh:mouget eo honnezh gant an amva.Ur plac'hig am eus,Brittia hec'h anv,ha dezhi tost da dri bloaz.Komz mat a-walc'h a ra ar sangoeg ha zoken geriennoù arabek gant va boy ha'm mevel-soudard,hogen diaes-kenañ eo he lakaat da gomz brezhoneg,ha dic'houzvez dezhi ar galleg a zo yezh ar wengroc'heneion...

Ar pezh a skrivit diwar-benn ar morian kongoat-se a nac'h deskiñ yezhoù afrikek da skolidi e vro ned eo ket evit va souezhiñ.Ar re zu,pa'z int 'emdroet' a ra fae peurliesañ war sevenadur o bro:si fall an holl re drec'het eo,hini ar Vrezhoned da skouer,kemerout pep tra,ar fallañ zoken ha dreist-holl,e ti an alouber.Gwregel eo pep pobl trec'het evel ma skriv an Aotrou 'n Eskob Tugdual I-añ e " Bretagne Réelle",77,P.3 diwar-benn ar Gelted;met perzh ar Gelted ned eo ket e-giz ma kav dezhañ ha da E.RENAN,perzh ar gelted faezhet ne lavaran ket .Alies em eus lavaret e vefe ur Breizhad eus an diwezhañ heksagongarour ! Amañ emeur boaz ober gant ar yezh sangoek gant holl zugroc'heneion Oubangui-Chari,kenyezh an darempredoù kenwerzh etre ar v-Bajaed,Mandzjaed,Bandaed,Budigried,Azeneed hag,evel-just - o yezh-i eo - ar Jakomaed.

A - D R E U Z L E N N .

Bleuñ-Brug. War an niverenn 113, gwengolo 1958, eus ar gelaouenn "Bleuñ-Brug" e c'heller lenn danevelloù kenstrivadegoù Pont' N -Abad ha Sant-Tegoneg. Siwazh ! nebeut a vugale o lenn, hag holl e seblantont dont eus un nebeudig skolioù: Pouldergad, Gwiskar, ar Grouaneg. Paotr e bet e Pont' N-Abad.

Pax . "Chronique Trimestrielle de l'Abbaye de St Guénolé de Landévennec". Er pennad "En Parcourant les Revues Bretonnes" n'eus meneg ebet eus ur gelaouenn Vrezhonek ! Sklaer eo emeur dedennet e Landevenneg kentoc'h gant an Istor hag an Hendraouriezh eget gant al Lennegezh Vrezhonek ha buhez kulturel ar bobl vreizhat .

La Bretagne Réelle. "Industries de Bretagne", gant Ronan Tugdual. Div levrennig gwerzhet 550 lur, da gas d'ar c'h-K.R.P. 754 82 war anv "La B.R.". Displeget eo bet er studiadenm-se un nebeut menozioù fur diwa r-benn ijine zhioù hor bro. Siwazh ! Kerik eo pep embannadur gant la B.R.

Israel . E Nazared, kalz a vicherourien hag^a blac'hed eus ar bobl a gomz peder yezh: arabeg, hebreeg, galleg ha saozneg, hag a ziskouez ur spered digor-kenañ. ("MISSI", genver 1959.

L'EDUCATION EN ISRAEL, gant an Ao. Avidor, rener meur Ministrerezh Israelat an Deskadurezh hag ar C'hultur, embannet e niverenn mezheven 1958 "Dastumadenn Analutek an Deskadurezh". Trec'h an Hebreeg a zo bet aes en abeg da niver bras ar yezhoù komzet gant an enbroidi: 70 anezho komzet gant tud o tont eus 60 bro disheñvel.

Skolioù ispisial a zo bet digoret evit an Arabegeien, anezho Muzulmaned ha Kristenien bodet en-dro da Nazared dreist-holl. Darepredet int gant 90 % eus ar baotred ha 50 % eus ar merc'hed etre 6 ha 14 vloaz. An Hebreeg hag ar Saozneg a vez kelennet evel eil yezhoù adalek ar 4-et hag ar 6-et bloavezh.

Katalaneg. Yezh ofisiel ANDORRA a zo ar c'hatalaneg. Er skolioù e kelenner ouzhpenn ar Galleg hag ar Spagnoleg. (La Croix 20.8.58)

Scoil Eanna: hanter-kantvet bloavezh skolaj Sant Enda en Iwerzhon. Skolaj St Enda a voe digoret e gwengolo 1908 e kêr Dulenn gant Patric Pearse. Displeget en deus bet eñ e-unan pal e oberenn en un dastumad skridoù embannet e stumm ul levr goude e varv dindan an titl: "The History of a Success". (Istor ur Berzh). "E-pad meur a vloavezh em eus maget ennon ar c'hoant bras da gaout ar chañs da stummañ, pe da sikour stummañ, buheziù krennarded war-du paliù uhel. Evel kelaouenner ha kelenner skol-veur n'em boa ket tro da gaout ur seurt chañs, ha setu perak e tivizis krouiñ an degouezh. Gounit a ris un nebeut mignoned d'am menoz krouiñ ur skol hag a glaskfe stummañ paotred vat kentoc'h eget paotred desket, met paotred desket kentoc'h eget paotred varrek da dremen arno - dennoù; ha peogwir evidon, un den mat, mar deo Iwerzhonad, a zle bezañ un Iwerzhonad mat, ha peogwir evidon, an deskadurezh, mar deo roet d' un Iwerzhonad, a zle bezañ diazezet war an deskadurezh Iwerzhonat, va skol a vo Iwerzhonat en ur ster ha n'eo ket bet anavezet (dre huñvre zoken) en Iwerzhon abaoe tec'hadenn ar Jarled ".
diwar EIRE ,15.9.58.

Komision Dasorc'hidigezh ar Yezh Iwerzhonek. Hervez ar c'hentañ Ministr Eamon De Valera, en e brezegenn da vodadeg kentañ ar Gomision, e vo dasorc'het ar Yezh gant kenlabour ar Stad, an Tiegezh hag ar Gaeltacht, ar rannvro ouezelek. Dasorc'hidigezh ar Yezh eo unan eus palioù pennañ ar vro hag unan eus ar re ar muiañ preset. (diwar EIRE, 29.9.58)

Labour an Tad Flanagan. Etre 1917 ha 1948, bloavezh e varv, en deus bet dastumet an Tad Flanagan, un Amerikan Iwerzhonat, 8 000 paotr e Boystown, paotred distaotlet gant ar gevredigezh. 95 % anezho a zo bet saveteet. Goude ar brezel en doa krouet seurt kêrioù er Japan hag en Alamagn.

E reolenn: klask krouiñ en-dro d'ar paour kaezh bugale-se an aergelc'h a garantez a rae diouer dezho.
(ECCLESIA, miz du 1958.

Professeurs au Maroc, gant Jacques ha Françoise Atger, embannet gant ESPRIT, miz mezheven 1958. Komz a reont goude bezañ tremenet 7 miz er vro, adalek here 1957 betek ebrel 1958.

A - Merzout a reer e-touezh ar re yaouank ur c'hoant gouzout gwirion. Nebeut a c'hell mont betek ar vachelouriezh, a zo ur gwirdreist. Dre ziouer a stern, e vez roet kargoù uhel da dud hag a zo bet tremenet dre ar skolioù-etre hepken.

B - Ar Galleg eo ar yezh-kelenn. Ar skolidi a gav dezho e ouezont ar Galleg evel re Vro-C'hall. Studiet e vez ouzhpenn:

1- ar rann-yezh,

2- an Arabeg klasel, dre droidigezhioù betek ar 1-añ klas,

3- ur yezh estren, ar Saozneg peurvuiañ.

C - ar Galleg a zo dor ar C'hultur Gallek.

1- N'int ket dedennet kement gant ar gened lennegel ha ma'z int gant ar c'hultur a zo evito un nor digor war ar bed modern.

2- Al levezon gulturel a vez posubl pa ren ar fiziañs. Kreskiñ a ra diouzh ma koazh ar levezon bolitikel.

D - Kudenn ar C'hultur Arabek.

1- an arabeg en deus krouet gwechall ur c'hultur bras, talvoudus evit gwechall, met dic'hallus da ziskoulmañ kudennoù a-vremañ Marokiz yaouank.

2- Ar geleennadurezh a zo re europat. Un arabekaat kreñv a c'hell hepken krouiñ ur c'hultur bev.

3- A-raok ma vo bet krouet ur c'hultur arabek modern (c'hoariva, barzhoniezh, prederouriezh) e vo ret tremen dre gultur ar c'hor-nog anavezet dre ar Galleg.

E - Barnadennoù disheñvel.

1- Darn a lavar ez ay al levezon gulturel war wanaat war-undro gant levezon ekonomikel-politikel an drevadenn c'hall.

Ur seurt levezon a zo un doare kolonialouriezh a glask peurheñvelaat ar C'hultur hag ar c'hultur kornogel ha gall.

2- Ar c'hultur gallek en deus digoret an nor d'ar vroadelouriezh. War zigarez doujañ personelezh ar warezidi ez eus bet nac'het outo tizhout an emskiant vroadel ha drezi an hollvedelezh.

Klozadur. Ar pezh a zo talvoudus evit al levezon n'eo ket ar menozioù diwar-benn ar frankiz, an disujidigezh pe ar vroadelouriezh met an darempredoù pemdeziek.

"Humanisme Nègre" gant Maurice Houis. (Pennad tennet eus ur brezegenn displeget e Dakar d'ar 16 a viz genver 58, en "Ensavadur Gall Afrika Du") " Esprit, miz du 1958, p.p. 571/574 .

Aozet eo bet ar studiadenñ-mañ gant un den hag a gar ar c'hulturioù du hag a glask an tu d'o mirout a-dreuz kemmadurioù hag ezhommoù ar vuhez vodern.

Niverusoc'h ha muioc'h rouestlet eo du-hont ar c'hudennoù eget e Breizh. Menegomp hepken ar skritur, niver ar yezhoù, ar yezhadurezh, stad "dre gomz" ar c'hultur. Met ar gudenn-diazez a zo heñvel. An diskoulm kinniget am eus kavet fur: un div-yezhegezh kempouezet mat . . (A-benn dek vloaz amañ e c'hellimp mont da c'houlenn sklerijenn digant mistri-skol Gwinea, pe Vali !)

"Revision et développement des Programmes Scolaires, Résumés d'Etudes choisies", e-barzh "Dastumadenn analutek an Deskadurezh", niv. ebrel-mae 1958. (embannet gant an UNESCO).

Ne gaver en niverenn-mañ nemet diverradurioù, met talvoudus int evelato. Taolenniñ a reer mat pep taol-arnod, pep enklask, ha displegañ sklaer hag eün ar c'hlozadurioù. Studiet eo enno an holl zanvezioù kelennet er skol, hag ivez holl balioù ar skol, desavadurel, kevredigezhel, kulturel.

(Komz a reer zoken eus un enklask sevenet er Filipinez hag a zo bet meneget e SKOL, niv. 1, mae 1954 . N'omp ket eta tud warlerc'hiet.

Deskiñ lenn e 6 eur . Ar c'helenner saoz Caleb Gattegno en deus ijinet un doare da zeskiñ lenn e chwec'h eurvezh, gant ma vez fonetikel ar skritur.

Tachennoù-c'hoari ha liorzhoù evit ar vugale. An tachennoù-c'hoari a zo niverus e Kopenhagen hag e-diavaez kêr. Aotreiñ a reont ur bern embregadennoù a-ziavaez-ti, evit bugale ar vicherourien hag an implijidi. Unan a zo talvoudus dreist-holl. Tost emañ da gêr, ha savet eo bet evit ar marevezh a dremen etre an distro diouzh ar skol ha diwezh an devezh-labour evit ar gerent. Savet eo bet dre emglev etre ar gerent. Pep hini anezho i en deus roet e skodenn, met sikcuret mat int bet gant ar stad. Berzh en deus graet kement-se, ken eo deuet buan da vezañ un ensavadur desavadurel, da lavarout eo, un arnodenn-skouer.

Ur reolenn hepken : reiñ d'ar vugale pep frankiz.

An diazez: ober ar gwellañ implij eus an aer vras, lakaat ar vugale da vevañ dindan an amzer.

Al liorzh en em ziskouez eta, da gentañ-holl, evel ul lodenn douar dic'hounit, e-lec'h ma vez degemeret da n'eus forzh pet eur, bugale ha krennarded etre daouzek ha c'hwezek vloaz. War ar vevenn ez eus bet savet un toullad logelloù-koad, enno salioù-labour pourvezet mat a venvegoù a bep seurt, en o zouesk ur c'hozh post skingomz, ur bellgomzerez taolet d'ar blotoù, un eskemmer, h.a.

An dachenn a zo rannet e lodennoù: pep lodenn eo perc'henn warni, evit ur pennad amzer, ur strolladig bugale, a ra war he zro gant ur c'huzul-ren.

Gwelout a reer diouzhtu ar pal: tennañ diouzh ar vugale ar c'hompleks a vez alies o hini e kêr: "N'hellan morse ober ar pezh a blij din."

Lezet war an dachenn-se e-lec'h ma 'z int mistri, ar vugale a c'hell ober tan, keginat, labourat douar, sevel loened. Pourvezet ez eus bet evito, bern war vern, traoù a bep seurt: drailhennoù logelloù-koad, kozh karroñsadorioù, sternaj mirc'hi-tan, tuellennoù, plenken, mein,

(kendalc'h war ar bajenn 8)

LEVRIOU EVIT AR VUGALE HAG AR SKOLIOU.

KONTADENNOU KOZH HA NEVEZ. (SKOL niv.4, rummad nevez. Priz:600 lur)

Barnadenn R.HEMON, war " Ar Bed Keltiek", miz genver 1959.

" Aes eo merzout eo bet savet an oberenn gant ur skolaer ampart, a anavez spered ar vugale, hag a oar ervat pezh a c'heller deskiñ dezho ha penaos kelenn.

Al levrioù implijet betek-hen er skolioù a zo , un darn vat anezho, divyezhek. El levr-mañ n'eus nemet brezhoneg. Un dra reizh eo. Ret eo boazañ ar vrezhonegerien vihan da soñjal en o yezh, da zisplegañ o menozioù dre gomz ha dre skrid en o yezh, hep rankout keñveriañ atav gant ur yezh all. "Ar Brezhoneg dre ar brezhoneg" a dlefe bezañ ar reol.

Ur gwir defizor e vo al levr d'ar skolaerien. An hanter eus o labour a zo kempennet evito. O heuliañ aketus kentelioù ha poelladennoù, pennad dre bennad, e c'hellont kaout fiziañs da dizhout ar pal."

Hini " AL LIAMM ", niv.71, du-kerzu 1958.

" Al levr a denn da " Me a Lenno " Yann Sohier dre m'eo displeget pep tra e brezhoneg ha dre ma'z eus pennadoù-lenn gant poelladennoù ha displegadurioù war-lerc'h.

Ar poelladennoù avat a zo kalz niverusoc'h hag an doare d'ober diazezet war stummoù nevesañ ar gelennadurezh... Desket e vez gerioù diwar-benn pep lodenn eus ar vuhez hag ar vuhez a-vremañ n'eo ket hini hon tadoù kozh....

Gallout a ra servij d'ar gerent, zoken pa n'int ket boaz da gelenn, rak ar respontoù hag ar gerioù da zeskiñ a vez roet war-lerc'h ar goulennoù.

An oberenn-mañ a seblant dimp bezañ savet matre ha gellout a raio bezañ implijet gant an holl gerent a sav o bugale e yezh ar vro. Hor gourc'hemenoù d'an oberour !

Hini an Ao.Chaloni GLOAGUEN, r.ner an deskadurezh kristen en eskopti Sant-Brieg ha Landreger

" Ce fascicule propose aux professeurs de breton un instrument de travail efficace et adapté, si l'on veut bien lire d'abord les judicieux conseils de la Préface. Il rassemble des histoires anciennes et nouvelles, tirées du meilleur cru, Marvailhoù ar Vretoned par exemple, et propose à leur suite des exercices oraux et gradués et écrits sur le vocabulaire, la grammaire, l'organisation de la phrase bretonne... Le but est de donner aux enfants une connaissance vivante de la langue, pour qu'ils puissent la parler et l'écrire avec aisance. C'est dire que l'ouvrage n'est pas un livre d'initiation à la langue bretonne... Son utilité se situerait au niveau du Cours Moyen, lorsque l'élève est déjà en possession des premiers éléments de la langue.

Il rendra service aussi, et suffira, pour la préparation de l'interrogation de breton au B.E.P.C. "

" Bulletin Mensuel", miz genver 1959.

E PEP BRO E VEZ KELENNET ER SKOLIOU UR YEZH PEURUNVAN.....

BUGALE VREIZH O DEUS AR GWIR DA VEZAN KELENNET E BREZHONEG.....

BUGALE VREIZH O DEUS AR GWIR DA VEZAN KELENNET E BREZHONEG PEURUNVAN.

EN PAYS BILINGUE : LA FRISE, " Cités Unies", kelaouenn " Le Monde Bilingue", miz du 1958.

Dindan an talbenn-se eo bet embannet ul lodenn vat eus troidigezh ar studiadenne a oa aet d'ober niverenn 2 "SKOL": Kelennadur ar Frizeg.

" Cette étude faite par M.L'Abbé Le Calvez, en 1954, est un modèle de bonne méthode et d'objectivité... Nous estimons que les conclusions auxquelles aboutit l'abbé Le Calvez ont une valeur générale et que les enseignements qu'elles contiennent pourront aider à mettre de l'ordre dans la confusion qui entoure si souvent les problèmes du bilinguisme."

Madeleine Loewenthal.

LUDUENNIG, KABELLIG RUZ, GWENN-ERC'H, embannet gant "AL LIAMM", 150 lur ar pezh; e gwerzh e ti SKOL, ivez.

Tri levrig nevez a zo bet embannet gant "Al Liamm": dek titl a zo bremañ er rummad-se. A-walc'h eo evit ur mare; da v e vefe bremañ kre-giñ gant ur rummad all evit bugale goshoc'h.

Ur yec'hed eo sellout ouzh taolennoù "Gwenn-Erc'h". Kalz gwelloc'h eo enno an tresañ hag al livioù.

Un nebeudig evezadennoù a rin diwar-benn ar yezh:

"Luduennig". Er frazenn-mañ ar ger "yude" ne seblant ket din dereout: " bemdez ez ae ar verc'hig war he bez hag eno e yude". (kentoc'h " e ouele, e c'harme")

Ur wech c'hoazh em eus kavet ar stumm " vezoc'h", a zo rann-yezhel evidon.

"Kabellig-Ruz". Ar frazenn-mañ a seblant din stummet fall: "Neuze e serras an nor ha mont e gwele ar vamm-gozh". Skrivet am bije-me : " Neuze e serras an nor, hag ez eas ..."
pe " Serrañ a reas an nor ha mont ..."

Er frazenn-mañ n'eo ket heuliet reolenn an amzerioù : "Pa glevas K.R. mouezh c'hros ar bleiz he devoa aon " ("he devoe")

"Gwenn-Erc'h". Er frazenn-mañ en em gav ivez un islavarenn stummet direizh: " Un deiz ma oa gwisket pep tra gant an erc'h, hag an heol o parañ oude ar gorventenn, e teuas ar rouanez da wriat". Skrivet am bije : " ...ha ma pare an heol gant ar gorventenn ..."

Rebechouigoù, en gwirionez, e-skoaz brasder an oberenn boulc'het gant "Al Liamm" war an dachenn-se.

LES LOUPS DE COATMENEZ. adembannet gant "Mouladurioù Coelbren", J.M. Bouessel du Bourg, 38; av. Emile Zola, PARIZ 15-et (150 lur + 30 lur evit ar mizoù, K.R.P. 14 350 33, PARIZ) e gwerzh ivez e ti SKOL.

Ar romantig-mañ a sikouro ar vugale etre 8 ha 14 vloaz da zizoleiñ Breizh hag he sevenadur skeudennet gant " teñzorioù Anna Vreizh".

COEURS SAUVAGES D'IRLANDE, gant José-Marie Bouchet, embannet gant HACHETTE, rummad "Idéal-Bibliothèque, 620 l; evit bugale etre 10 ha 14 vloaz.

Danevellin a ra al levr-mañ trubuilhoù hag avañturioù un Iwerzhonad hag ur Saoz Yaouank e-pad ar brezel etre Iwerzhon ha Breizh-Veur. Kelenn a ra an haelded, ar fealded d'ar vammvro, an doujañs evit pep bro, al lealded en darempredoù, hag ar garantez evit an holl dud.

CONTES DE BASSE-BRETAGNE, gant François CADIC, mouladurioù Erasme, Pariz; 220 pajenn in 8° : 900 lur .

Lenn a reer el levr-mañ 21 eus ar gwellañ kontadennoù dastumet gant hor c'henvroad. Bez'ez eo ivez, hep mar, al levrenn blijusañ en un dastumad gouestlet da "Rannvroioù Bro-C'hall", dindan renerezh Paul Delarue ha paeroniezh Mirdi an Arzoù hag an Hengounioù poblek.

METHODE D'HISTOIRE DE BRETAGNE, gant Gérard TOUBLANC, embannet gant "LABOUR", c/o Gérard Toublanc, 88, avenue des Ternes, PARIS, 17-e . Priz : 300 lur, 68 pajenn liesskrivet, ment "Skol".

Al levrig-mañ a zo bet savet evit harpañ skauted Bleimor d'aozañ o arnodenn istor Breizh. Setu perak e kaver war-lerc'h pep kentel - anvet amañ : fichenn - evit ma c'hellfe pep studier pouezañ e ouiziegezh. Talvoudus e vo ivez d'an holl dud yaouank, ha zoken d'ar vistri-skol a rank e berr amzer reiñ un alberz eus istor Breizh.

PETITE HISTOIRE ET GEOGRAPHIE DE BRETAGNE, gant J. LE GOUIL, embannet gant les éditions de L'ECOLE, Pariz; 48 p. 12.18 cm.

Al levrig-mañ a zo anezhañ un doare "Breizh Hor Bro" evit ar skolioù, gant goulennoù ha respontoù evel er c'hatekiz. Studi an douaroniezh denel a ro tu dezhañ da gomz diwarbenn ar yezh, ar gwiskamantoù hag ar sonerezh. Tu a vefe da dabu-tal diwar-benn un nebeut respontoù gouestlet d'an darempredoù etre Breizh ha Bro-C'hall: blaz ha c'hwez ar wirionez ofisiel a zo ganto.

Savet eo bet, anat eo, gant ur mestr-skol breizhat ha kristen leun a garantez evit e vro, he feiz hag he yezh. Hetiñ a ran dezhañ bezañ strewet en holl skolioù a r vro.

LITTERATURE BRETONNE, tennet eus "Encyclopédie de la Pleiède, Histoire des Littératures, 3, Littératures Connexes". Pemzek pajennad, aozet ha skrivet aketus gant J. Delalande-Kerlann evit reiñ un alberz eus hol lennegezh adalek an derou betek hon amzer. Daoust d'e verrentez ez eo plijus ar pennad da lenn, ha klok a-walc'h e seblant din bezañ. Hep reiñ rolloù diziwezh hag arabadus ez eo deuet a-benn da venegiñ ar skrivagnerien hag an oberennoù poue-zusañ.

Evit kompren ar stourm renet gant difennourien ar "Yezh Oc" - ha darn eus difennourien ar Brezhoneg - n'eus nemet lenn klozadur ar pennad gouestlet d'ar yezh-se en hevelep levrenn:

" Ces idées cardinales formulées, sinon soutenues, il resterait, chose importante, à fixer la position littéraire de l'occitan par rapport au français. Cette position n'est pas séparative: elle est complémentaire.

Certes le français a pour lui la grande prose, les hautes spéculations, l'éloquence et le drame. Mais Oc garde le meilleur du peuple et de la terre. Il est plus près du sol, plus près des âmes. Moins préoccupé d'intelligence, il touche davantage à la sensibilité immédiate. Il échoue dans la philosophie, mais il excelle dans la malice. Son vocabulaire, éminemment riche et concret, alors que le français tend volontiers à l'abstraction et au dessèchement académique, est des plus propres à l'expression du réel. Oc ne s'en tient pas là: il rivalise avec Oui dans un certain lyrisme, où il apporte plus d'enthousiasme et d'abandon; il va jusqu'à le suppléer dans l'épopée rustique, à quoi le prédispose une imagination luxuriante et un sens exquis de la nature."

stagadenn da "SKOL", niverenn 5, miz meurzh 1959.

ENKLASK DIWAR-BENN " AR BREZHONEG ER SKOL" .

Anv: chomlec'h :
micher ganet d'an
dimezet / dizimez . niver ar vugale:

1- Goulennoù da vezañ sevenet ar c'hentañ ar gwellañ :

- A.- kelc'hiad kentañ:
- B.- Kelc'hiad-echuiñ :
- C.- Deska durezh vicherel :
- D.- Deskadurezh hollek :
- E.- Skolioù danvez-mistri :
- F.- Skolioù-Meur :

2- Palioù da dizhout tamm-ha-tamm :

- A.- Kelc'hiad kentañ :
- B.- Kelc'hiad-echuiñ :
- C.- Deskadurezh vicherel :
- D.- Deskadurezh hollek :
- E.- Skolioù danvez-mistri:
- F.- Skolioù-Meur :

3- Lec'h ar Brezhoneg e skolioù Breizh-Uhel :

- A.
- B.
- C.
- D.
- E.
- F.

4- Kinnigoù ha menozioù diwar-benn advrezhonekaat ar skolioù.

Notenn: Respont war ar follenn-mañ, pe war follennoù all. Pedet eur da skrivañ war un tu hepken, ha da virout an niverennoù hag al lizherennoù .

RESPONTIT DIOUZHTU ! Trugarez.

PRENIOU AN NIVERENNOU KOZH

<u>Rummad kozh</u> ,niv.1	: Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre.	200	lur.
1954-1957	2 : Keleennadur ar Frizeg .	id.	
	3 : Douaroniezh Vreizh .	id.	
	4 : 300 Divinadell.	id.	
	5 : Rimadelloù hag Unangomzoù.	id .	
	6 : Kudennnoù ar Skolioù er Slesvig.	id .	
<u>Rummad nevez</u> ,	1 : Skol Sant Erwan.	id .	
1958	2 : Nedeleg en Breizh, pevar fezh-c'hoari gant J;Priol.	350	l.
	3 : Danevelloù diwar-benn Skol Sant Erwan, ha Bleuñ-Brug Treger.	200	l.
	4 : <u>Kontadennoù Kozh ha Nevez</u>	600	lur,franko.

Ul levr klok da gelenn ar Brezhoneg, e Brezhoneg penn-da-benn .

LEVRIOU E GWERZH E TI SKOL :

Merc'hig ar Rozenn	,150 lur	Istor Meudig	,150 lur.
Paotr e Varv Glas	, id.	Ar Goantenn e Koad ar	, id.
Robinson Kruzo	,180 lur.	Luduennig	, id.
Ar C'hemener Bihan	, id.	Kabellig Ruz	, id.
Ar C'hazh gant Heuzioù	,150 lur	Gwenn-Erc'h	, id.
An Ti Satanazet	,350 lur	Labous ar Wirionez	, 400 l
Alanig an Tri Roue	,400 l	Marvailhoù ar Vretoned	, 250 l
Lommig	,350 l	Bisousig, Kazh an Tevenn	, 150 l
Tour Ar Bleiz	,100 l	Ali-Baba	, 180 l.
C'hoariva Brezhonek	,300 l	Notennoù d.w.b.ar Gelted,	800 l.
La langue Bretonne et ses combats, gant Roparz HEMON			, 350 l.

Lennit e Brezhoneg kaerañ levr ar bed : AR BIBL .

Aviel Sant Mazhe	,250 lur	Diskuliadur Sant Yann	,180 l.
Koheleth	,80 l.	Levr ar Furnez	,180 l.
Aviel Sant Yann	,180 l.		

nevez embannet : Aviel Sant Mark, troet gant M.Klerg, 350 l.
evit pep levr lakaat 50 lur ouzhpenn evit ar mizoù-post.

K.R.P.D11 Sant Gall de Pons, LOUANNEC, C D N ; Roazhon, 519 40 .

Stagadenn da "SKOL", niverenn 5, meurzh 1959. (Supplément à S K O L ,
"RIMADELLOU HA KANAOUENNOU EVIT AR VUGALE " Mars 1959)

embannet gant " Komz ha Kan " . (1)

tu kentañ ar bladenn.

MA BREUR JAKEZ.

Ma breur Jakez (2 w)	Sonit 'ta sonerien
Kousket out (2 w)	Dañsit pilhaouerien
	Bim Balañ (2 w.)

Tostait amañ bugale, c'hwi ' zo ' vont da glevout traoù
plijus deoc'h da zeskiñ :

Setu amañ petra ' lavar ar c'hog:	"Deut ar mestr d'ar gêr ",
hag ar c'hazh	:" Mêo, mêo, mêo ",
ha neuze ar c'hi	:" atao, atao, atao ",
hag ar pemoc'h	:" peoc'h, peoc'h, peoc'h ".

Bremañ ur rimadell.

Me 'm boa gwelet e Pont-Paol
Daou gi du o plantañ kaol,
Al louarn oc'h arat,
Hag ar yer o pigellat
An houldi dorn en dorn
O kas an toaz d'an ti-forn.

Bremañ ur sonig da lakaat ar vugale da c'hoari marc'h war ar varlenn:

Marc'h Hamon a ya da Vrest
Dishouarn, diga bestr
Dreist ar vein, dreist an drein
Mari vihan, war e gein ,
Unan all war e choug,
Unan all war e lost,
Da vont da gas ul lizher d'ar post.
D'ar paz, d'ar paz, d'ar paz
D'an drotig, d'an drotig, d'an drotig
Ha d'ar c'haloup vras (2 w .)

Hei do ! marc'hig
P'lec'h emañ da barkig
P'emañ pell, p'emañ tost
Me ' vo er gêr, 'raok an noz.

Marijanig a blij din
Kalz a labour a ra din
Goro 'r saout, o c'has er-maez
Hag o skuilhañ din va laezh.

SON TONTON IVON.

Tapet eo bet, tapet eo bet
Tonton Ivoñ, o tougen kañvoù d'ar person
Tapet eo bet , tapet e vo
Oc'h ober lez da Vijini ar Floc'h.

Kamm an hini bihan
Kamm an hini bras
Pengamm ar wreg
Hag an o'ac'h ' zo gwazh .

II

Bichig maerñ, pelec'h out bet ?
- En ti all. - Petra ' peus bet ?
- Un tamm bara amann
Un tamm bara laezh
Hag ar vazh da vont er-maez.

Kroget e vez e dorn ar bugel, hag e vez lavaret an dra-mañ dezhañ:

Hemañ en deus diskoachet ar c'had,
Hemañ en deus redet war he lerc'h,
Hemañ en deus paket anezhi,
Hemañ en deus debret anezhi,
Hag hemañ, an hini bihan paour
A zo aet da lavaret d'e vamm,
troc'hañ dezhañ, ur pezh mell, pezh tamm bara amann.

Al logodennig vihan.

Al logodennig vihan
E peseurt toull emañ ,
En toull-mañ pe en toull all ?
Aet gant ar c'hazh.
Pelec'h emañ ar c'hazh ?
E penn ar bern kolo .
Pelec'h emañ ar c'holo ?
Devet gant an tan .
Pelec'h emañ an tan ?
Beuzet gant an dour .
Pelec'h emañ an dour ?
Evet gant an ejened .
Pelec'h emañ an ejened ?
Aet da goad ar Roc'h
Da ober fic'h ha foc'h .

Kroget e vez e daouarn Margodig vihan hag e vez rollet tu ha tu,
hag e vez kanet dezhi evel-hen :

Rollit, rollit tu pe du
Botoù ler, loeroù ru
Distoupit, distoupit
Margodig vihan.

Setu amañ ur ganaouenn da laret d'an dud mont d'an oferenn:

Mamm-gozhig, tad-kozhig,
Da belec'h emoc'h o vont ?
D'an iliz, da bediñ
Deuet asamblez ganeomp.

Biskoazh kemend-all.

Biskoazh kemend-all
N'am boa gwelet an deiz all,
An oferenn d'an abardaez,
Ar gousperoù da c'houlou - deiz .

Biskoazh kemend-all
E Landerne an deiz all,
Ul louarn o werzhañ yer
Hag ur pemoc'h gouez o werzhañ per.

Biskoazh kemend-all,
Pevar lagad d'ar marc'h dall,
Pa 'z a gant an hent, e wel un tu,
Pa zeu en-dro e wel un tu all,
Setu e wel kement hag un all.

III

VA ZI BIHAN WAR AR MAEZ .

Me am eus un tiig war ar maez
 Hag a zo toet gant krampouezh,
 E vogerioù ' zo graet gant yod
 Al leur-zi gant laezh-ribod.
 Pa baro an heol war an to
 Va c'hrampouezhenn a grazo.
 Pa gouezho glav war va zi
 Ez in war neuñv gant ar gwazi.
 Kouezhet va moger en he foull,
 Em zoenn ez eus un toull,
 Va c'hazhig a lip ar yod.
 Va c'hi du a dap e lod.
 Me am eus debret leur va zi
 Gant plijadur, 'n eur c'hoari,
 Ha bremañ ne chom mui netra
 Nemet yod da zifoeltra.

Ur roue hag ur rouanez,

O daou otennañ panez.
 Ar panez a oa kaer,
 A oa aet gant al laer;
 Al laer a oa fin,
 A oa aet da evañ gwin;
 Ar gwin a oa krefiv,
 A oa aet d'ar penn a-dreñv.
 Ha neuze ' oa aet sot,

Ha goude se en doa lammet e-barzh ur podad yod.

AR PODIG YOD.

Ur wech e oa ur plac'hig a oa o chom gant he mamm-gozh e-kichen ur c'hoad bras. Ar goañv a oa, hag e oa yen an amzer, hag ar plac'hig a oa bet kaset gant he mamm-gozh da zastum keuneud, koad krin er c'hoad.

E-kreiz ar c'hoad en em gavas gant un itron gaer, gwisket kaer, ur steredenn en he blev.

- Deiz mat, Itron, eme ar plac'hig.
- Deiz mat, plac'hig vihan. Petra ' rez amañ, pa vez ken yen an amzer ha serret an holl dud en o ziez ?
- Me, Itron, a zastum keuneud evit va mamm-gozh. Ni hon div a zo paour, hag a rank aliës mont da gousket abred, hep tamm koan.
- O, va flac'hig kaezh, eme an itron gaer, c'hwi a ya da gousket hep ta-mm koan ?
- O ya, re baour omp, eme ar plac'hig, ha n'hon eus ket arc'hant da bremañ netra.
- O, va flac'hig-kaezh ! Kae buan d'ar gêr, degas din ur pod ha deus amañ en-dro, ha goude se se m'hel lavar dit, n'az po ket naon ken.

Setu ar plac'hig o vont en ur redek da di he mamm-gozh da gemer ar pod, ha dont en-dro buan d'ar c'hoad da reiñ d'an itron gaer.

An itron a gemer ur va zh, ur vazh-hud, hag a sko dre deir gwech war ar pod. Reiñ a ra en-dro ar pod d'ar plac'hig hag e lavar dezhi:
 - P'az po naon, n'az po nemet lakaat hennezh war an tan ha lavarout teir gwech : " Podig bihan, poazh ".

IV

Hag ar podig bihan a boazho yod dit .Met pa vo echu;pa vo echu ar pod da ober yod ,lavar teir gwech : " Podig bihan,gra ket mui ! " Klevet mat hoc'h eus ?

- O ya,Itron.Trugarez deoc'h.Kenavo.

Hag an Itron a yeas kuit evel dre vurzhud.

Ar plac'hig a zistro d'ar gêr,ha diouzhtu e ra tan,e lak an trebez war an tan hag e lak ar pod war an trebez. Ar vamm-gozh,sebezet,a lavar:

- Met ,petra ' rez,Mari ,petra ' rez aze,te ' oar n'eus netra da lakaat da dommañ e-barzh ar pod.

- Lez ac'hanon d'ober,mamm-gozh,lez ac'hanon d'ober.Ha dre deir gwech e lavar: " Podig bihan,poazh."

Setu avat ma klever un trouz e foñs ar pod:glouk,glouk,glouk,glouk,glouk...Ha yod,yod gwenn,yod mat,a grog da sevel er pod ha da dommañ.

Pa oa leun ar pod betek ar bord,ar plac'hig vihan a lavar: " Podig bihan,gra ket mui ". Glouk,glouk,glouk...Setu echu ar yod da sevel e-barzh ar pod.

Neuze e laker ar pladoù war an daol ha tennet e oa al loaioù eus an diretenn ha bec'h d'ar yod avat !

Ar vamm-gozh hag ar plac'hig o doa bet leun o c'hof a yod en noz-se.

Bremañ ne oa ket paour ken ar vamm-gozh nag ar plac'hig. Rak ma n'eo ket brav debriñ yod bemdez,setu ar pezh a voe graet. Graet e voe yod evit an dud a-ziwar-dro;an amezeien a zæue da bremañ ar yod mat-se digant ar vamm-gozh.Setu diwar neuze e voe arc'hant evit prenañ traoù all.

Ur wech avat e oa aet Mari d'ar marc'had abred diouzh ar beure hag e oa lezet ar vamm-gozh hec'h-unan e-barzh a n ti.

Ar vamm-gozh pa oa erru kreisteiz a oa kroget an naon enni hag e lavar:" Sell ' ta,n'eus netra er ganastell,netra da zebriñ. O ! met gwir eo,aze 'mañ ar podig bihan,hennezh a raio yod mat din.

Hag e lak an tan war an oaled,hag an trebez war an tan,hag ar podig war an trebez,hag e lavar dre deir gwech,evel m'he doa klevet Mari 'c'h ober : "Podig bihan,poazh ". Glouk,glouk,glouk... Setu avat ar pod bihan da ober yod,ken ha ken.

Met pa oa leun ar pod,ar vamm-gozh ne oa ket ken evit kaout soñj eus ar pezh a lavare Mari da lakaat anezhañ da chom a-sav hag ar podig bihan a rae bepred:glouk,glouk,glouk,glouk...

" A-walc'h,a-walc'h a zo,met n'eus ket ezhomm ken", a lavare ar vamm-gozh;met ar podig bihan a oa bouzar ha dall hag e rae bepred yod.Ha setu ar yod o kouezhañ en oaled,o kouezhañ war an tan,oc'h en em astenn war al leur-zi ha glouk,glouk,glouk...

Ar vamm-gozh a gerzhe bremañ e-barzh ar yod gant he botoù-koad.Glouk,glouk,glouk..."A-walc'h,a-walc'h,n'eus ket ezhomm ken,a-walc'h podig bihan".Ar podig bihan a oa bouzar.

Setu ar yod oc'h ober an dro d'an daol,dindan gwele ar vamm-gozh,e-barzh gwele ar vamm-gozh.Penn-da-benn betek ar prenestr,penn-da-benn betek an nor.Hag ar yod bepred,bepred,bepred o redek,hag o redek.Ar vamm-gozh bremañ he doa ranket mont er-maez.

Setu ar yod o vont e-barzh an ti e-kichen,dre an nor ha dre ar prenestr.Glouk,glouk,glouk....Leun e oa an eil ti hag an trede ti hag evel-se penn-da-benn.An dud o doa ranket mont er-maez eus o ziez ha pignat war ur menez uhel da welout ha ne vije ket deut Mari d'ar gêr eus ar marc'had.

V.

Mari a voe gwelet, pell, pell, pell, evel ur pik du war an hent. Hag o welout kemend-all a dud war ar menez du-hont o hejal o di-vrec'h, e sonjas diouzhtu da Va ri e oa c'hoarvezet un dra bennak fall er gêr, hag e haste, hag e haste war an hent.

Poent e oa. Pa oa degouezhet, dizalanet, e lavaras buan hag e komprenas diouzhtu: " Podig bihan, gra ket mui".

Poent e oa. An holl diez a oa leun a yod; ne chome nemet un ti ha ne oa ket aet ar yod e-barzh. Bremañ, avat, an holl dud a oa nec'het evit mont en o ziez. Petra ober ? "N'hellomp ket chom amañ e-kreiz ar goañv e-barzh ar c'hoad, rak ar bleizi marteze a zeuio da zebriñ ac'hanomp hag ouzhpenn, yen-du eo".

" Ma, eme unan, ar pezh hon eus d'ober eo kemer pep a loa, ha mont ouzh hor prenestr ha debriñ yod leun hor c'hof".

Setu ar pezh a voe graet. Siwazh, en ur ober e-giz-se avat ne voe graet nemet un toull bihan-bihan, hag ar yod a chome, a chome e-barzh an tiez.

Neuze e voe ret d'ar wazed dont gant paliou ha pigelloù hag e lakjont eizh devezh leun da zileuniañ an tiez ha da dennañ an holl yod er-maez.

Setu petra ' c'hoarvez pa reer an traoù a-dreuz !

PET EUR EO ?

Pet eur eo ?	- Nav eur hanter.
Piv 'n eus laret ?	- Al logodenn.
Pelec'h emañ ?	- Er chapel wenn.
Oc'h ober petra ?	- Ober goulou.
Peseurt goulou ?	- Goulou koar .
Peseurt koar ?	- Koar melen .
Peseurt melen ?	- Melen vi.
Peseurt vi ?	- Vi yar .
Peseurt yar ?	- Yar wenn .
Peseurt gwenn ?	- Gwenn-sin .
Peseurt sin ?	- Sin fall.
Peseurt fall ?	- Fall-du.
Peseurt du ?	- Du-pod.
Peseurt pod ?	- Pod pri.
Peseurt pri ?	- Pri prad.
Peseurt prad ?	- Prad lenn.
Peseurt lenn ?	- Lenn Geravel, stanket he zoull en daou benn.

Bremañ emañ o vont da c'hoari ar bleiz hag an deñved. Ar vugale a zo an deñved, dirazo emañ ar mesaer, astennet e zivrec'h o ti-wall anezho. Emañ ar bleiz, pe ar bleizi, o c'hortoz ma vije echu an diviz etre ar mesaer hag an deñvedigoù evit redek war o lerc'h:

- Deñved, deñved, deuit d'ho kraou.
- Perak, perak ?
- Emañ ar bleiz er c'hoajaou ?
- Pet anê ?
- Nav ha dek .
- Piv eo an tad ?
- Ar gontell vras .
- Piv eo ar vamm ?
- Ar gontell gamm.
- Diwallit, diwallit, deñved paour diouzh ar bleiz kounnaret .

VI.

Pa vez ul le etre daou vugel e reont bizig-krog en ur lavarout ar rimadell-mañ, da startaat ar bromesa graet etrezo:

Bizig bihan, bizig bras
Ma larez gevier ec'h i d'an tan bras.
Bizig bihan, bizig spern,
Ma larez gevier ec'h i d'an ifern.

eil tu ar bladenn.

DISUL ME ' VO PINVIDIK.

1.

Disul me ' vo pinvidik
P'am bo prenet ur yarig. (2 w.)
Kag-ha-gag eme va yarig,
Kag-ha-gag a rae !

2.

Dilun me ' vo pinvidik,
P'am bo prenet ur c'hogig,
Kokogog, eme va c'hogig,
Kag-ha-gag eme va yarig,
Kag-ha-gag a rae!

3.

Dimeurzh me ' vo pinvidik,
P'am bo prenet ur bisig.
Miaou miaou miaou eme va bisig,
Kokogog, eme va c'hogig,
Kag-ha-gag eme va yarig,
Kag-ha-gag a rae.

4.

Dimerc'her me ' vo pinvidik,
P'am bo prenet ur c'hiig.
Waou waou waou eme va c'hiig,...

5.

Diriaou me ' vo pinvidik,
P'am bo prenet ur marc'hig,
Heñ heñ heñ eme va marc'hig,....

6.

Digwener me ' vo pinvidik,
P'am bo prenet ur vuoc'hig.
Meu meu meu eme va buoc'hig,....

7.

Disadorn me ' vo pinvidik,
P'am bo prenet un hoc'hig.
Oc'h oc'h oc'h eme va hoc'hig,...

An dra-mañ a vez kanet e Montroulez d'ar vugale pa vezont gwisket a-dreuz d'ar beure .

P'eus ket gwelet Champi
'Tiskenn an Dourdu
E roched 'r maez e vragou
Dibrenn an daou du.

iHa me lavaret dezhañ:
Deus amañ Champi gaezh
Ma prennin dit da vragou,
Da roched ' zo er-maez.

WII.

VA LABOUSIG GWENN.

1.

Me an eus paket ul labousig gwenn,
ul labousig gwenn
A gren e vruched evel un delenn
O kanañ din-me e vravañ kanaouenn.

2.

Va lez da nijal a lavare din
A lavare din.
Me ' gano kaeroc'h va sonioù lirzhin,
Diouzh an noz, bemdez, hag ivez d'ar mintin.

3.

Kerzh en aer eta, va labousig gwenn,
Va labousig gwenn,
Nij a tav seder, kan bepred laouen,
Me an bo keuz atav dit, va labousig gwenn.

Evit ober dañs-tro setu amañ :

Marijanig ,Lagad - bran.

1.

Marijanig ,Lagad-bran,
O Marijanig, va filhorezig,
Marijanig Lagad-bran,
A vez atav e-tal an tan.

diskan.

Tan, tan, tan,
Ma vo tomm da Varijanig,
Tan, tan, tan,
Ma vo tomm da Varijan!

2.

Pa vez erc'h ha skorn kalet
E vez atav 'tal an oaled.

3.

Pa vez ruziet beg he fri
E lavar da dintin Mari:

4.

Pa vez skornet he meudoù
E lavar da donton Jakou:

SON AR C'HAZH.

Me ' m boa ur c'hazhig bihan
A oa marv goude koan.

Selaou 'ta ,va bisig,
Selaou 'ta, va bouchig,
A gohtas an hini gozh
Digou, digou daka.

Me 'm boa graet gant e benn
Ur skudell da lakaat soubenn.

Me 'm boa graet gant e zaoulagad
Ul lunedoù da va zad.

Me 'm boa graet gant e zivskouarn
Daou bladig da walc'hiñ 'n daouarn.

VIII.

Me 'm boa graet gant e zent
Ur rastell da rastellat foenn.

Me 'm boa graet gant e groc'hen
Teir liñsell ha div lenn (= palleñn)

Me 'm boa graet gant e lost
Ur gazeg 'vit mont d'ar post.

Me 'm boa graet gant e zaou araog
Div vazh da vazhata 'r ribod.

Me 'm boa graet eus e zaou adreñv
Ur skeul hir da vont d'an neñv.

Me 'm eus graet eus e stlipoù
Teir dousenn rubanoù.

Me 'm eus graet eus e doull-flaer
Ur veskenn d'ar c'hemener.

YANNIG, AN DIFOUPER NEIZHIOU.

ur son gozh evit ar vugale , anavezet e Leon, e Treger hag e Kerne.

1.

Kavet 'peus da saout 'ta, Yannig,
Kavet 'peus da saout 'ta?
- Ne 'm eus ket, ne 'm eus ket)
Gwelloc'h 'geto 'm eus kavet) div wech.

2.

Petra 'peus kavet 'ta, Yannig,
Petra 'peus kavet 'ta ?
- Un neizh pig, un neizh bran
Hag un neizhig laouenan.

3.

Petra ' zo enno 'ta, Yannig ?
Petra ' zo enno 'ta ?
- Unan ruz, unan gwenn,
Unan glas, unan melen .

4.

Degas din, unan 'ta, Yannig ,
Degas din, unan 'ta .
- Ne roin ket, ne roin ket,
Ar-se ' zo 'vit ma gwreg.

5.

Peseurt gwreg ac'h eus 'ta, Yannig,
Peseurt gwreg ac'h eus 'ta ?
- Unan vihan, unan vray
Hag a sav mintin atav .

6.

Peseurt soubenn 'ra 'ta, Yannig,
Peseurt soubenn 'ra 'ta ?
Soubenn pesk, soubenn fresk,
Soubenn vijil alies .

IX.

KAOURANTINIG HA MARIVONIG.

1.

- Kaourantinig - Pelec'h 'c'h ay ar saout warc'hoazh, Marivonig ,
 Pelec'h 'c'h ay ar saout warc'hoazh ?
 Marivonig - Da bark ar Reier Glas, Kaourantinig ,
 Da bark ar Reier Glas.
 Kaourantinig - O kasit-i, ha deuit en-dro
 Ha ni a c'hoario, Marivonig.
 O-daou - Ha ni a c'hoario.

2.

- K - Peseurt c'hoari a vo, Marivonig,
 Peseurt c'hoari a vo ?
 M - C'hoari bouloù-derv, Kaourantinig,
 C'hoari bouloù-derv.
 K - C'hoari bouloù ha meinigoù
 War leton ar prajoù, Marivonig.
 O-daou - War leton ar prajoù.

3.

- K - An hini a gollo, Marivonig,
 An hini a gollo.
 M. - Daou aval a baeo, Kaourantinig,
 Daou aval a baeo.
 K - Ha d'ar park bras e ray an dro
 D'ar red, ken na gouezho, Marivonig.
 O-daou - D'ar red ken na gouezho.

AN DURZHUNELL.

Kalz amzer am eus kollet
 O furchal er c'hoajoù
 'Vit sourpren an durzhunell
 Kousket war ar brankoù.
 Skoaziet em eus va fuzuilh
 Met tennet em eus fall;
 Tec'het kuit an durzhunell
 Ha nijet er c'hoad all.

Diouzh an noz hag ar mintin
 ' Klevan al laboused
 O kanañ, o fredoniñ
 Da veg ar gwez pignet.
 N'eus nikun anezho
 A bikfe va c'halon
 Evel mouezh an durzhunell
 O ouelañ d'he mignon.

Petra, turzhunell yaouank,
 A dourmant da galon ?
 - Kollet em eus , emezi,
 Va fidelañ mignon !
 Ma ne zeu ar chaseour
 D'ober din-me mervel
 Me ' varvo gant ar glac'har
 D'am mignon koant fidel.

FLOC'H AN AOTROU.

- 1-Floc'h bihan an aotrou... 4-Plac'h vihan an aotrou...
 E selloù glas a zo flourik ! Labennoù babu-mae dezhi !
 -Arabat sellout war ho lerc'h plac'hig ! -Arabat sellout war ho lerc'h, floc'hig !
- 2-Floc'h yaouank an aotrou 5-Plac'h yaouank an aotrou
 En deus divc'har prim ha skañv ! Eo skañv he zroad war vale !
 - O hastit ,plac'hig, -O perak floc'hig
 Gant aon na dostafe ! Chom da c'hortoz evel-se?
- 3-Floc'h yaouank an aotrou, 6-Plac'h yaouank an aotrou
 Pebezh dilhad kaer dzhañ ! Pebezh jakenn ga er dezhi !
 -O plac'hig! perak eo juntet ken brav O floc'hig!perak eo juntet ken
 ho tavañjer hidou ? (hidou-hiziv)Ho chupenn hidou ? brav

JULIG AR VERVERO.

- 1-Me ' gave din ur wech dimezet, 4-Dimezet d'un ever gwin
 Julig ar Ververo, A ya d'an davarn bep mintin.
 N'am bije graet netra ebet, 5-An dud yaouank pa zimezont
 Juliver tonti,juliver tontoñ, Ne ouzont ket petra ' reont.
 Julig ar Ververo
 Daoulagad a skuilh daeloù.(a) 6-C'hwi tud yaouank,dizimez c'hoazh,
 'Raok dimeziñ,grit mat ho choaz.
- 2-Padal e rankan ober tout, (a) peurvuañ e lavarar :
 Aozañ krampouezh ha fritañ yod. daoulagad ar c'hwil-derv.
- 3-Ar pezh a gavan gwashoc'h c'hoazh
 Eo pilat lann gant va zreid noazh.

BANNIELOU LAMBAOL.

- 1- Me 'm eus bet plijadur,e Lambaol a-wechoù
 Oc'h ober tro an iliz,gant an holl vannieloù.
- diskan. Jo po po po,landibidi dibi, Mantur la ridondênig,
 Jo po po po,landibido, Jo pi rei pi ra, la.
- 2-Hag o stouiñ ganto,dirak an aoter vras,
 Hag ouzh o c'vel kerkent er vann,ken dres all c'hoazh.
- 3-Plijadur am beze,pa veze ar pardon,
 Oc'h ober tro ar vered,gant an dud a galon.
- 4-Eno ' veze gwelet pa groge an avel,
 Piv ' oa ar baotred wellañ da zougen ar banniel.
- 5-Ha dre ma tremenent a bep tu d'ar vali,
 Gant o zeod flour,ar merc'hed,a roe o ali.
- 6-Hag a rae o dibab,e-touez ar baotred **vras**
 A welent en o c'haerañ o tremen dirazo.

1) soñjet hon eus e vefe degemeret-mat an testennoù skrivet gant
 prenerien ar bladenn,a zo e gwerzh e ti an Ao.F.Kervella, hag e ti
 " SKOL " evit 1 500 lur; K.R.P. 1911 06, Roazhon.
 An testennoù-mañ a zo bet diskrivet gant an Itron Kervella.

directeur-gérant-imprimeur : Armand LE CALVEZ,
 RENER-MEROUR-MOULER : Skol Sant-Erwan,PLOUEZEC. C D N.

diskleriet hervez lezenn : eil trimiziad 1959.
 dépôt légal : deuxième trimestre 1959.

